

PLAC'H KOANT BREIZ-IZEL

379

En l'honneur des Reines de Cornouaille, fêtées à Quimper, le 14 Septembre 1924

Had-savet a beurz Loeiz ar Bourbis, penn-rener gouel ar Rouanezet

(Rééditée à la demande de M. Louis Le Bourbis, organisateur de la Fête des Reines)

I

Setu me koz ha dizantet, ha prestik ma c'halon
N'hellou mui, siwaz ! mignônet, kana na gwerz na zon ;
Velkent e loskin c'hoaz, skiltruz araog mervel,
Eur ganaouen karantezuz da verc'het Breiz-Izel.

II

Chom keit-all heb sevel eur zon, ô Doue pe ger kri !
D'ar re deuz laket a viskoaz ma holl goad da virvi :
Trugare c'houlennan ; rag hirie hon er zell
De n'em Digoll en ho kenver, merc'het koant Breiz-Izel.

III

C'hwiti 'peud toulllet he speret d'ar *barz* en pep amzer .
Evidoc'h he zellou lemma, he zonjou gloan ha kaer ;
Ureou alaouret ! a dalek oe bugel,
Ar *barz* 'so deoc'h korff hag ine, merc'het koant Breiz-Izel.

IV

Ho sellou flour, ho c'hoarz sklintin c'ha beteg ar galon,
Ho mouez voan a zao an ine dre an disterra zon ;
Gant eur zin ar baotret na c'houlennont ked well,
Met senti ouzoc'h en pep tra, merc'het koant Breiz-Izel ?

V

Gant ho kwiskamanchou ker koant, plen pe marellet kaer,
Ho kwefou gwenn dantelezel, a zougit gant herder ;
Koulz barz er baourente 'vel en eur renk hûel,
Oc'h bepred tentuz ha dispar ! merc'het koant Breiz-Izel.

VI

Korfet brao, kerc'hen gallouduz, beg flour gant diou rozen,
Troad distag gant eur bale skany, lagad sklaer ha laouen ;
Dre holl hag en pep stum, en tok pe diskabel,
E c'hanvezer dreist ar re all merc'het koant Breiz-Izel.

VII

Netra 'vank da verc'het ma Bro, na tû na bravente,
Na nerz na dalc'h, speret, furnez, gant se gwir garanté ;
Eur genet burzuduz (?) 'lakafe gant eur zell
Yann-ar-Gall da beur diodi ! Deuz maouez Breiz-Izel.

VIII

Redet meuz a bep seurt broyou, gret ganen tro ar bed,
Poezet genet ar merc'hejou dre lec'h hon tremenet,
Ha n'heblec'h ne weliz, nag a dost nag a bell
'Seurt d'an hini 'zao ken iskiz gant merc'het Breiz-Izel.

IX

N'ententan ked dre ar genet eur skeuden koantiri
C'ha brao deuz drem merc'het ar Spagn ha re an Itali,
Denz lagadou dû kaer ; met a zo dishanvel
Ha disterroc'h en pep stum all deuz merc'het Breiz-Izel.

X

Sellit deuz plac'h distum Bro-Zaoz, moan ha plad penn-da-benn,
Deuz an Normantez teo ha grôz, en giz d'eur vogoden (?)
Ar peur-rest en Bro-c'Hall 'renk starda ho c'hroazel ;
Ia ! dre holl e m'aint pell war lerc'h merc'het koant Breiz-Izel

XI

Ouspen e tougit serz bepred eun tenzor ar c'haera
A zalc'h hom gwen dud en he zao, ne oar den ped mil vloa !
Baleit sonn ho penn. ganeoc'h 'man ar siel
Deuz starta tud a oe biskoaz ! merc'het koant Breiz-Izel.

XII

Te eo rouanez ar merc'het, ne dal ked dislaret,
Dre c'halloud hag en pep doare, plac'hik ma bro garet !
Ma vije bed ar c'hiz kass merc'het d'ar brezel,
Te 'raeche stoup deuz ar re all, maouez koant Breiz-Izel.

XIII

Met arabad 've ken brezel war gern ar bed paour-man :
Goude ker goaz spontr ha dismantr, ar Boblou 'gle breman
Ober ar peoc'h paduz, dont prim de n'em zével ;
Peoc'h hag urz-vad, frankiz d'ar Bed ! dreist holl da Vreiz-Izel.

XIV

Rag aman 'raer c'hoaz brezel zod d'ar yez kaer brezonek.
Met war ze ni m'eump eun harz krenn, ma vichemp kalonek
Da c'houlen assemblez, dre holl a vouez hûel
Diski 'nezan d'hor bugale en skôliou Breiz-Izel ?

XV

En deiz ma vemp holl unanet da zifen hom gwirion,
Pobl all ebed n'eo ar gallout da gerz war hom zeuillou ?
Pa na laesfomp netra da vont gant an avel,
Ar vûe 'vo demp kaeroe'h c'hoaz, merc'het koant Breiz-Izel.

XVI

Da c'hortoz, kendelc'hit 'veltomp, d'ober ho teveriou,
Ha ni 'vo brudet ha meulet ! a dreuz an amzeriou,
Vel eur Wenn-Dud dispar, nerzuz ha divarvel !
Pebeuz enor deoc'h da viken, merc'hejou Breiz-Izel !

Ch. ROLLAND.

PAOTR HE C'HALLEK PLAD

(Ton Ar Pillaouer)

1
Me m'ëuz eur servicher lorc'hek,
Penvidik, met leun a c'hloar!
Neuz ankouezet he vrëzonek,
Na gir gallek mad ne oar?

Diskan

Fœi war-n-haon! gant he vern ardou,
Gallek sôd leiz he henou!

2
Ma lapouz 'so deuz Kollorek,
Zavet ëo bed er c'Hoat-Fô,
Lêc'h na wie den gir gallek
Breman 'zeuz ugent vloaz-so

(d'an diskan)

3
Pa c'han gantan d'ar pardoniu
Ne fell ked d'ar brëz-breizad,
Gant aon da frëga he 'hennou,
Komz ken en langaj he dad.

4
Dec'h em pardon braz Kearahez,
O redek ar staliou kaer,
Me 'oa tapet ganaouegez
En kichen ma Fipi-goer;

5
Dirak pep stâl e lavare :
« Régard coum chë bô tout cha ?
« Jeannet, je vë té régâlë ;
« Prends tout chë que tu foudra ? »

6
Met pa grogen n'eun dister dra :
« Laichë cha ; fiens donc plus loin ?
Hag ëru en hini bella :
« Rentrons pas dans che châl koin ! »

7
Prena 'ra koss seniou gal'ek,
N'eur c'hopal « Chë ben, chë bon ! »
Pa giniger daon brëzonek :
« Je 'n chais pas lir' du brëton ! »

8
Mil gâz a raez gant ma ine,
Ma preniz seïz kanaouen !
En eur reï he zac'h d'an den ze :
Kerz d'ar gear da ziski lenn ?

Diskan

Feï warnout gant da vern ardou
Gallek sôd leiz da c'hennou!

9
Mez a meuz ganed, pladennek,
A te zavet er vro-man,
Rez da fae war ar brëzonek
Goude n'ouzaez nemet-han ?

10
Ma p'ije bed en da empenn
An disterra tamm skiant,
C'haechaez pell deuz Breiz da bourmen,
Pe taol kwit da wiskamant !

11
Pennerez hon, m'ar temezan,
Zur nê ked te to ar maout ?
Gant ar sort dide na gouskan,
Me m'o kentoc'h eur paotr-saout !

12
Ma p'ije gwelet ma lapouz,
An daelou n'he zaoulagad (!)
O skampa kwit trist a pinouz!
C'hoarzet o p'ije da vad!.....

13
Grid hol evelton, merc'hejou,
Hag e wellomp a bep tu
Kement hiani zoug ar bragou
O komz brezonek dustu !

Diskan

Enor d'an holl yaouankizou
Brëzonek c'hoek n' ho genou

14
Paotret pa c'hit da verc'heta
Leuskit ho kallek ergear ?
A c'hwi 'vo ganemp ar c'henta,
En Kerne, Leon ha Treger !

15
Pa m'eum daou yez em Breiz-Izel,
A benn ma yël mad an traou,
Vo red demp holl en eur zevl
Diski 'neze reïz ho daou :

16
A m'ar fell d'eoc'h mont en gallek
Na lerit ked hini plad ?
A pa gomzfot ar brëzonek
Distagit anezan mad !

Diskan

Enor d'an holl yaouankizou
Brëzonek leiz ho genou !

JANIK KOAT-FREO. V. P. C. C. : CH. R.

L'APRÈS-GUERRE

Air de l'auteur « Gare au Tigre »

I
La France immortelle est debout,
Malgré tous les Tyrans du Monde,
Poussons le devoir jusqu'au bout.
Pour la rendre forte et féconde :
Ne dormons pas sur nos lauriers,
Mais pleins d'ardeur vite à l'ouvrage ;
L'Amour, l'ange de nos foyers,
Nous invite et nous encourage :

(au refrain)

II
Plus fiers, plus libres que jamais,
Nous ferons la bonne besogne,
Ayant pour notre sang français
Le vin généreux de Bourgogne,
Du champagne et du cidre doux,
Servis par notre aimable idole,
Qui chante et qui danse avec nous
La gavotte et la farandole.

(au refrain)

III
Aux champs si bien qu'à l'atelier
La vie reprendra de plus belle ;
Voyez nos grands corps de métier
Déjà rivaliser de zèle ;
Mais il faut pour se mettre en train,
En ce bon moment transitoire,
Tant que l'on valse avec entrain
Fêter dignement la victoire !

(au refrain)

IV
Une ère de progrès géant
S'ouvre à la saison printanière,
Sur terre, au ciel, sur l'Océan ;
Rentrons chacun dans la carrière ?
Pour prendre encor part au tournois,
Dame Fortune nous convie,
Guidés par cet esprit gaulois
Que le Monde entier nous envie.

(au refrain)

V
Quand on a versé tant de sang
Pour ses patrimoine et prestige,
L'on saura bien tenir son rang,
Le dépasser même en prodiges :
Débarrassés du grand Vautour,
Nos rêves les plus grandioses
Vont nous enchanter tour à tour,
Jusqu'au suprême apothéose !

(au refrain)

VI
Marchons, guidés par la Raison,
Au relèvement de la France ;
Marions-nous ! c'est de saison,
Pour oublier notre souffrance :
Progressons dans l'Ordre et la Paix
Vers plus de splendeurs que naguère,
Pour que l'on chante désormais,
Vivent les poilus d'après guerre !

(au refrain)



V. P. C. C. : CH. R.

REFRAIN
Jeunes vainqueurs, quel gai retour,
Lorsqu'on a bravé les tempêtes !
Partout les cœurs vibrent d'amour !
C'est l'ère des joyeuses fêtes :
Chantons, dansons,
Tourbillonnons,
A nous les charmantes conquêtes ?
Que l'on profite des beaux jours
Pour s'unir et s'aimer toujours !



Quimper. — Imprimerie Bretonne.